



Kalvar Kastellin dindan an erc'h

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 68 (Mensuel)
Abonnement : 500 Francs

C'HOUEVRER 1954

HON TI



Va dousig Marijan,
Ha ne lavar ket gaou,
A gav ma zi bihan
Bras awalc'h evit daou.

'Ne gavell e richan,
Mabig daoulagad glas :
Hon ti a zo bihan,
BENNOZ DOUE ' ZO BRAS !

Ma fried Marijan
'Zo deut du-mañ da chom :
Hon ti a zo bihan
Met hor c'halon ' zo tomm.

*Savet gant Evnig-Penn-ar-C'hoad war
eun ton koz dastumet gant an ao.
Y.-V. Perrot.*


TAOLENN

Hon Ti, gant Evnig-Penn-ar-C'hoad.	
Evit hor sikour da anaout gwelloc'h an oferenn, gant L. B.	2
Frederik Ozanam, gant L. B.	3
Emziskouezioù ar Wero'hez e Breiz, gant L. ar Floe'h.	4
Kentelioù d'an dud yaouank, gant L. L.	5
Eur Stourmer all	7
Al labour douar e Breiz, gant an Ao. de Guebriant	8
Ar Skoazellerezh familh	9
Aluzenn an d'iaoul, gant ar breur Dominik	10
Eur gontadennig	11
Eur sarmoun Eured, gant an T. G.	12
Buhez ar Bleun-Brug	14
Keleier	15
Indianed ar C'hanada, gant J. Konan	16
Truez ouz ar paour, gant Milik ar Skañv	17
Skol ar bobl	18

KLEVIT 'TA !! ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1954 ?

Eun tammig bolontez vat, mar plij, ha pep hini en em gavo eürus : c'houi da veza paet ho tie, ha ni da c'hellout mont war-raok. — Koumanant ordinal 500 lur — a enor : 600 l. — madoberour : 1.000 l. — V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist. C. C. P. 544.22 Nantes.

133679



Laouen bras omp bet, o reseo digant hon Aotrou 'n Eskob Fauvel, ar gourc'hemenhou-mañ e penn kenta ar bloaz nevez. Gant doujañs e lavaromp d'ézañ hor gwella bennoz Doue. O tont warlerc'h re an Aotrou Kardinal Roques, Arc'heskob Roazon, se a zo evidomp eun nerz da genderc'hel gant hon labour santel ha breizek.



L'Evêque de Quimper et de Léon

vous présente l'expression de son paternel dévouement. Il vous remercie de vos vœux de Nouvel An et est heureux, en souhaitant au Bleun-Brug une année féconde en travaux et en rayonnement, de bénir ses efforts dans la ligne des traditions chrétiennes de la Bretagne.

Quimper, le 25 Janvier 1954.

† ANDRÉ,
Evêque de Quimper et de Léon.

Evit hor sikour da anaout gwelloc'h priz an oferenn

AN traou uhela ha kaera, a c'heller lavaret ha skrivá, ar zent, doktored an Iliz, hag an dud deskét, o deus hel lavaret ha skrivet diwar-benn an oferenn. Evit mad hol lennerien, e plij d'eomp lakaat aman unan bennak eus o c'homzou.

« En oferenn, a lavar d'eomp an doktor bras, Sant Thomas, e kaver an holl frouez, an holl grasou, an holl denzorieu, en deus Mab Doue skuilhet ker puilh war e Iliz, dre sakrifis menez Kalvar. »

« Ha gouzout a rit-hu, eme Sant Leonard a Borz Maoris, petra eo an oferenn ? Hi eo heol ar relijion gristen, ene ar feiz, kalon Aviel Jezuz-Krist ; en eur ger, hi eo an diverra eus kement a zo kaer ha mat e Iliz an Aotrou Doue. »

Petra dalv an oferenn, klevomp Sant Bernard, mignon bras ar Werc'hez Vari, o lavaret d'eomp : « An neb a glev mat an oferenn a zastum muioc'h a veritou eget na rafe o rei e holl zanvez d'ar re baour hag o redek ar bed holl da ober perc'hirinajou santel. »

Pa gerze Santez Jeann d'Arc, e penn an armeou, evit diframma ar vro a dre daouarn ar Zaozon, ha pa glève, diouz ar mintin, kloc'h eun iliz o c'hervel d'an oferenn, war ar pemdez, e lavare en eur hirvoudi : « A ! emezi, ma c'hellfemp kaout eun oferenn, pegen mat e vije d'eomp ! »

Priz an oferenn ? « Spered an den, eme ar Pab Pi XI, ne c'hell ket dizelei netra ken bras eget an oferenn, hi hag a gas da hesk trugarez dreist-muzul Doue e-unan. »

« Ar penn uhela hag evel kalonenn ar relijion, a lavar, war e lerc'h, Pi XII, eo mister sakramant an aoter, bet savet gant ar C'hrist, ar beleg bras, hag a fell d'ezañ gwelout renevezet, en Iliz, dre e veleien. »

E pelec'h, goude an testenieu dispar-se, e kaver displeget gwelloc'h petra eo an oferenn eget en hor c'hantig brezonek, « Kinnigomp holl ar sakrifis ». Klevit :

« An oferenn pebez teñzor
Dreizi Doue a gav enor
Dreizi e teu d'an eneou
Bennoz Doue gant e c'hrasou. »

Ha pelec'h kaout eun dra ken c'houek d'ar galon, ken dudius d'ar skouarn eget ar c'homzou-se, fichet ha kanet, war an ton kaer, a zo hemañ e levr kantikou Eskopti Kemper.

Goude beza o c'hlevet, piou n'en deus ket lavaret, war-lerc'h Yann-Ber Calloc'h :

« O douster an oferennou, o douster ! »

M'hor befe eur feiz birvidikoc'h, muioc'h a youl vat, ma lakafemp eun tammig poan da zellet a-dostoc'h outi, da anaout an holl binvidigezioù a zo kuzet enni, an oferenn a sklerijennfe hon dervezioù hag a vije evidomp eun eienenn nerzus a vuhez. Met sklêr eo, daoust pegen rouez ha pegen prisius bennak e c'hell beza eun teñzor, hemañ ne c'hell beza prizet ha karet, nemet kement ha ma vez anavezet.

Plijet gant Mamm Doue, ha sent hor Breiz, goulenn evidomp, o bugale, ar c'hras da garout muioc'h ha da heulia gwelloc'h an oferenn, a glevomp ken alies komz anezi, er bloa-mañ.

L. B.

FREDERIK OZANAM

Frederik Ozanam n'eo ket eur breizad. Dont a reas er bed e kêr Milan, er bloaz 1813, en amzer Napoleon koz.

Daou vloaz oa, pa zeuas da jom da Lyon. E dad hag e vamm a oa kristenien eus an dibab ; mat kenañ ouz ar paour.

Frederik oa ar pempet eus a bevarzek krouadur.

Goude beza dastumet eleiz a zeskadurez, o tarempredi skolachou Lyon ha Pariz, e teuas, yaouank e'hoaz, da veza mestr-kelenner, er Sorbonn, unan eus skolachou brasa ar c'houarnamant...

Nez ae ket kaer an traou gant ar relijion d'an ampoent.

Er c'heriou, dreist pep tra, ar vourc'hizien, koulz hag an dud e karg, a oa digredenn. Al labourerien, ma n'oant ket kouezet ken izel, a zileze tamm ha tamm hent an ilizou, dre ma z'ae war gresk o dienez...

En eun oad ha ne glask ar re all nemet ebatal, Ozanam a stag a-zevri d'al labour. D'e drivac'h vloaz, é skriv eul leor a-bouez, evit dispenn gevier an dud digredenn. Prest goude e c'halv eur strollad paotred yaouank d'en em voda en-dro d'ezañ evit studia asamblez gwirionezioù santel ar relijion.

Er bloaz 1834, goude beza bet meur o kaout arc'heskob Pariz, an Aotrou de Kelen, ec'h otten ma vezo diazezet, epad ar c'horaiz, *Konferañsou Itron Varia Bariz*, a gendalc'h abaoue da ober kement a vad d'an dud desket. War e c'houlenn, an *Tad Lacordaire* eo a zo choazet evit beza ar prezeger kenta. Prezeger all ebet ne lakaio kement a vrud da goueza war e ano.

Met sklerijenna an dud n'eo ket a-walc'h, ret eo ouspenn diskouez nerz ha kaerder ar feiz kristen dre an-oberou.

« D'eomp d'ar re baour », a c'houlenn Ozanam digant e vignoned hag e laka war-sav *Breurieziou Sant Visant a Baol*, karget da zastum aluzennou ha d'o ingala etre an dud reuzeudik. E berr amzer, ar breurieziou a en em skign en holl gerioù bras. Hirio o c'haver dre ar bed holl :

« Ober aluzenn a zo mat, emezañ, koulskoude n'eo ket an dra dalvoudusa. Da genta hag araoù ober vad eo ret beza just, rei d'al labourerien ar pezh a zo dleët d'ezo kaout, hervez o foan hag o labour. »

Betek e varo, c'hoarvezet d'an 8 a Wengolo 1853, p'edo c'hoaz e kreiz e vrud, e stourmo kalonek, dre e bluenn ha dre e gomzou, evit difenn an Iliz hag embann etouez an dud kelennadurez an Aviel, ha dreist pep tra lezenn ar garantez hag ar justis...

Bet eo, en e vuhez verr, unan eus kaera soudarded an Iliz katolik ha n'eo ket souez e ve bet graet gouelioù dispar en e enor, er bloaz tremenet, evit kantved bloaz e varo.

Er bloaz 1850, tri bloaz araoù e varo, e teuas gant e wreg hag e verc'h, oajet a 5 bloaz, d'ober eun dro da Vreiz.

Gwelet a ra, e Gwened, pardon bras Sant Visant Ferrier. Ae'hano ez a da Geranna hag e teu da Gemperle. E ti an aotrou a *Germarker* e chomo meur a zervez : « dervezioù dudius, emezañ, tremenet war ribl luskellus sterioù Izol hag Elle ».

Treuzi a ra Bro-Gerne, betek ar Raz, el lec'h ma trid e galon o sellet ouz ar mor bras ha divent.

Pep tra en hor c'horn-bro a blij d'ezañ, ar stankennou hag an torgennou goloet a c'hlaezvez, gourizet gant ar mor, an ilizou, ar chapelioù, ar c'hroazioù, met, muioc'h e'hoaz, e galon a zo gounezet gant gizioù fur, gant gizioù santel, spered kevrinus ar Vretoned.

Eus Lesneven, e skriv eul lizer d'eur mignon, evit lavaret d'ezañ pebez leve-nez eo bet evitañ ober anaoudegez gant Breiz-Izel. Chomet eo dreist-holl en estlamm dirak *Kastel*, ar gêr santel, ha gant tour ar C'hreisker, gwintet ken uhel, evel eun nadoz lemm, prest da doulla an oabl.

« Roue an touriñ, emezañ, ar c'haera eus ar re am eus gwelet, abalamour ma z'eo ar moanna hag ar stummet brava... Pa fell d'eun ael dont d'ober eur valeadenn dre zouar an Arvor, e laka e dreid da genta war gern ar C'hreisker... »
Evel ma welomp, ma n'oa ket breizad dre ar ouenn, Frederik Ozanam, goude beza anavezet hor bro, a oa deuet da veza breizad dre ar galon.

L. B.



Emziskouezioù ar werc'hez e Breiz

Liesgwech hon eus klevet tud difeiz ha zoken kristenien o lavarout gant eur mousc'hoarz amgredik : « N'eus nemet leanezed pe merc'hed yaouank ha bugale o deus diskoaz gwelet ar Werc'hez ».

Gwir awalc'h e seblant beza kement-se evit broioù 'zo : evit Breiz, ne lavaran ket. O sellout hepmuiken ouz ar 17-vet kant-ved, pa darze e bep tu en hor bro surzud eun hañv speredel, e c'hellfemp dibab meur e skouer arouezius : Mont-dont a rae ar Werc'hez e-kichen an Tad Visant Hubi (1608-1693), o kaozeal gantañ ; komz a rae evel eur vamm ouz Mikael Nobletz, en eur brezoneg flour ; hep konta gweladigezioù an Tad Maner pe Grignon Monfort... Leaned ha beleien ez int holl evelato.

Met pe z a zo souezusoc'h : c'hoarvezet eo kement-all gant kourerien Breiz-Izel. Arabat, da genta, ankouaat an hini a voe dibabet gant Santez Anna ? Nikolazig, eul labourer douar, dimezet ha tad. Estr egetañ a zo koulskoude : war-dro 20 vloaz araok, e fellas d'an Itron Varia e vije savet en hec'h enor Chapel ar Gioded, tost da Lariven.

Mont a reas e brezoneg d'eur c'hernevad paour-raz a oa o kas d'ar vilin e wenneg diwezañ evit prena eun tammig bleud d'e vugale varnaoniet. 35 bloaz pe war-dro en devoa Kloda Alan, eus Koad Koustronneg e parrez Botoha, pa gejas evelse gant Rouanez an Neñvou, eun deiz splann a viz Mae 1602. Daoust da rebechoù kriz ha da zisfiziañs e berson, e talc'has pennok ar gwaz-se, izelek hag eeun a galon ; dezañ eo e tleomp Pardon I. V. ar Gioded (sul kenta a viz Mae) ken karet c'hoaz gant Kerneviz.

En hevelep doare ec'h anavezet mat awalc'h ar merc'hed o deus skoazellet an Tad Maner gant o fedennoù, hag ivez ar veleien o deus labourret gantañ er misionou.

Disañjet eo avat, pe dost, eun den souezus, a zo bet renet gant an Tad Mat : Youen ar Gov, eus Kast, eul labourer douar a hanter-kant vloaz, o kaout gwreg ha bugale. E pad ar C'horaiz prezeget e Plouneour-Lanvern e 1656, e voe studiet piz gant an Tad Maner pe z a gonte Youen ar Gov hag ivez e zoare da vev. Ha sebezus e oa e gwirionez ! War c'houlenn Mamm Doue, e rae ar paotr-mañ pinijenn galet evit ar bec'herien ; yuna a rae bep gweñer hep kemer tra ebet nemet ar Gomunion ; e-pad ar C'horaiz, ne zebre tamm, ne eve takenn, nemet d'ar sul, goude klevout teir oferenn. Edo en e zaouzekvet Koraiz bevet evelse, daoust dezañ da genderc'hel evel boaz gant e labour douar. An Tad Maner a frealzas ar paotr, sentus hag eeun evel eur bugel : gourc'hemenn a reas dezañ kinnig eur groaz d'an Itron gaer a 'n em ziskoueze alies dirazañ. An Itron he devoa kemeret ar groaz ha poket outi gant ar brasa doujañs. N'helle ken an Tad mat doueti na vije ar Werc'hez.

Tri C'horaiz e yunas c'hoaz goude-se Youen ar Gov, gweladennet bepred gant an Itron Varia ; neuze ez eas d'he gwelet dremm ouz dremm er Baradoz. Dimp-ni da heulia eun tammig, skouer veur e binijenn e-pad ar bloavezmñ, evit hor pechejou-ni ha pechejou hor bro Vreiz.

(Diwar « Pedenn evit ar Vro », gant L. AR FLOC'H.)

Kentelioù d'an dud yaouank

An diskianteged.

Evel just ma 'z eus bet tud diskiant, pe ma 'z eus c'hoaz anezo eun eur familh, gwelloc'h trei ho kalon war eun tu all. An diskianteged en em sil, evel ar c'hleñvejou all, eus gwad ar gerent, en hini ar vugale, en hini ar vugale vihan, awechou, dreist hini ar vugale. Arabat koulskoude kredi an teodou fall. Ha hez ez eus anezo ! Da vare an dimezioù dreist-holl eo e reont o reuz, ha n'eus ket gwasoc'h egeto evit dua glana tud yaouank a zo hag o familh.

Tud a zo ha n'int ket diskiant hag a gredfed ez int pa weler an dizurz hag al loustoni a zo en o zieged, fazia, a c'heller, war ar marc'hed dreist-holl, pa vezont kanfartezed-lous ; n'eo ket rouez an niver anezo.

Al loustoni.

Ar vedisined a anavez mat ar re-se, fichet brao an diavaez anezo, difich o c'horf evit-se ; grit eun dro en ti, buan e vezo graet ho santimant. Al listri a zo war an daol pell bras goude dibri ; pardaez eo hag ar gweleou a zo da veza dreset ; e-kreiz a sizun emeur hag an dilhad sul a zo o rodella amañ hag ahont ; n'euz urz ebet gant neb tra ; kinniget e vezo d'eoc'h eur banne e gwer ha n'int ket kempennet piotr oar pegeit a zo. Pep loudourenn a gav mat he c'heustourenn. Ya, met c'houi n'ho pezo nemet donjer outi.

Più a zo da damal ? ar plac'h yaouank pe ar vamm ? Lous ar vamm, lous ar verc'h, lous ar vugale warlec'h.

P'eo deut an oad dimezi, re ziwezat eo d'hen deski. Berman ez eus skoliou (écoles ménagères) evit ar merc'hed elec'h ma vez desket d'ezo traou talvoudus ; kegina, gwriat, fera, kaout urz ive, a gredan, ha kement 'zo. Unvaniez Veur an Emgleviou-Micher e Landerne a bae seurezed ha merc'hed all anvet « assistantes sociales », evit mont war ar maez da ziskouez penaos kaout urz, beza kempenn ; setu arc'hant dispignet mat ! rak evit kas eur stal da netra n'euz ket par d'al loustoni. Buan e feuer da fallgaloni war al labour pa weler an traou diskempenn er gêr ; ar prejou atao diwezad, ar boued aozet fall, al listri lous, an dilhad o c'hedal eun taol palouer, eur gwri, eur voutonenn ; ar yalc'h o treutat ivez rak lous ha dispignus a zo breudeur !

Ne glaskin ket pemp troad d'ar maout ha diskleria ran, goude beza bizitet alies bugale ar skoliou : er skol eo, pa vez bihan ar vugale, e rankfed heñtcha war an urz-vad hag ar c'hempenn, argas al loustoni, ober mez d'ar re a zo rouestlet o bleo ha laou a-wechou enno, o veza ma ne vezont ket kribet, lous o bizaj hag o gouzoug roudennet du ha gwenn, an daouarn glaouek, an ivinou kañf ganto.

Lavaret e vez alies ez eo diskempenn ar Vretoned. Alies e vez gwir kement-se. Stankaat a ra koulskoude bremañ an tiez war ar maez hag a zo eur blijadur beva enno. Koanta plac'h yaouank ma 'z eo eul loudourenn, ne chomo ket koant pell amzer ha loudourenn e chomo atao.

Unan ha n'eo ket koant a zremm hag a zo kempenn, a ouezo atao kaout eun doare goant.

Sonjit 'ta araok dimezi e kemerit pried evit ho puhez penn da benn, hag ho pezo da vev an eil e ser egile noz deiz epad marteze hanter kant vloaz !

Diouz pep troad n'eo ket mat pep botez.

An techou fall hag ar c'hleñvejou a zeu d'an daoulamm, da vont kuit avat e vezont morzet ha kamm.

Prezeg mat a rit a lavaro va lennerien. Mes ma vije da sellout ouz re a draou araok dimezi pet a dud a rankfe chom dizemez !

Mez selaouit 'ta ! pa zibabit, n'eo ket eur pried hebken a gemerit, sonjit e timezit evit kaout bugale. Ar re-man a vezo diouz ar choaz ho pezo graet : yac'h, laouen, speredek, karantezus hag a ray enor d'o zud hag o lakao eürus, pe glañvidik, blin, infirm, diaes da sevel hag a roio d'eoc'h skuizder, poan spered. Ar ouenn ac'hanoc'h a vezo eta hervez an dibab pried ho pezo graet, ha keuz warlec'h ne dalv netra.

Ho kerent ha c'houi.

Ho tibab a zo graet ? En despet d'ho tad ha d'ho mamm ?

Arabab eo. Ma kav d'eoc'h int aheurtet e gaou, kemerit eun tamm pasianted. E-keit-se goulennit kuzul digant tud fur hag a anavezit mat, tud a oad kentoc'h, ho tad koz, mamm goz, eur beleg. Digareziou mat o deus ar gerent da enebi awechou ; awechou all ivez o deus re fall. Re yaouank eo ar paotr, pe re yaouank ar verc'h. Ha douget eo en eul lezenn benak gant gouarnamant pe Iliz e ranko ar paotr kaout 25 vloaz hag ar verc'h 22 ? Talvoudegez spered ha kalon eun den ne da ket atao da heul an oad. Paotred yaouank a zo d'o 20 vloaz ken gouest da entent ouz eun tiegez ha re all d'o 30 hag ousspenn. Merc'hed a zo barrek da gas eus ar gwella an traou endro en o zi hag da entent ouz bugale, daoust d'ezo da veza naontek pe ugent vloaz, gwelloc'h eget loundourennou koz a anaver. Ar furenteus eo a ra an oad. Ha neuze, daou zen yaouank hag a zo d'arempred etrezo epad rehir amzer o veza ma virer outo da zimezi, a zo da ziwall evito ; oc'h enebi, c'houeza tan eo a reer. An tan a lesk. Didana a vez klasket, eur gwall dan eo ar garanteus awechou, n'eo ket sent ha sentezed eo an holl dud a zo war an douar. Setu petra a gaver er c'hreñn lavar :

*Gwell dimezi paotr pe verc'h
Eget kaout keuz warlerc'h.*

Pa n'eo ket an oad an hini a rebecher, an dienez arc'hant eo peurluvia. Mat, evidoun n'em eus ket gwelet an arc'hant o rei spered, na kalon, na furnez, na skiant d'an neb n'en deus ket. Gwell a-ze ma z'eus danvez gant perziou mat, mes gwelloc'h eo perziou mat ha danvez dister eget kant mil luriou hag eur zac'had techou fall.

*Gwelloc'h dour ha bara sec'h
Eget gweneien leun an ti
Ma n'eo ket eürus neb en deus i.*

Alies c'hoaz an enebiez etre ar familhou a vir ouz yaouankizou hag a blij an eil d'egile da fortuna an eil gant egile ha padal ne vije netra gwelloc'h eget laza an enebiez-se.

Enebiez ? abalamour da betra peurliesha, pa vez dirouestlet mat ar gudenn ? Eur skourr war eur c'hae hag a zo bet troc'het hanter kant vloaz a zo ha ne dalveze ket daou wenneg ; paladig douar eur c'hae, skudellig dour eur c'houer, afer eur spilhenn d'an hira hag ho peus lakaet da veza ken teo ha tour ho parrez, eur spilhen da virout ouz eürusted daou zen, ar re wella a zo marteze er barrez.

L. L.



Eun divinadenn

Eun den diwar an oad,
A ra e zamm a goad ;
N'int ket koad eün, n'int ket koad kamm,
Na mat d'ober eur vrochenn-stamm.
Petra int 'ta ?

H. Breñn-eskenn.

EUR STOURMER ALL

Resevet em eus tri barzoneg evit va c'halanna. Ken laouen ez on bet, o klevout adarre mouez va mignon koz, Erwan ar Moal, ma fell din rannañ va flijadur gant lennerien Bleun-Brug. Arabab dezo ankouaat tad « Pipi Gonto » ha « Paotr e vragou berr », da geñver e 80° deiz ha bloaz, d'an 9 a viz C'houevrer. Ra chomo pell c'hoaz en hon touez rener koz « Kroaz ar Vretoned » ha « Breiz », bet feal bepred d'e feiz ha d'e Vreiz.

Beneat.

" AR MAEN DIWEZAN "

Koz oun ; peb euryez o tremen
A lak pouez eur maen war ma fenn
Da c'hortoz eun eur da vezañ
A lako ar maen diwezañ.

Hennez eo maen bras ar vered,
Tost d'an Iliz ha d'ar porched,
Skrivet anouñ war e du,
Re va zud koz aet da ludu.

En harz ar maen pa zaoulinan,
Eur vouez a sav a zindanan,
Eur vouez iskis, ha p'he c'hlever,
Gridien ar maro a grener.

El lec'h-mañ, betek fin ar bed,
Setu da wele doun ha kled,
Eur gwele aozet a bell-zo
Aozet gant ludu da dado.

Deus eta, da blas a zo graet ;
Betek pegeit 'vi gortozet ?
Gouzout a rez, deuet eo da dro
Da zont davet ar re varo.

Amañ kavi digemer mat
Gant mamm, moereb, mamm-goz ha tad,
Gant holl gerent yaouank ha koz,
N'o lez ket pelloc'h da c'hortoz.

Met gant a ri, gwalc'h da ene ;
Naet 'ranker mont dirak Doue,
Hag e kavi, e doun ar foz,
Toull hent skedus ar Baradoz.

Dir-na-Dor (Eost 1953).

— D'an hini a stourmas pell hag hir a-gevret gant an ao. Perrot, Bleun-Brug a zo eürus da ginnig e wella gourc'hemennou doujus hag anaoudek.

AL LABOU-DOUAR E BREIZ a baoc hanter-kant vloaz

*Kendalc'h eus prezegenn an ao. de
Guebriant e Bleun-Brug Kastellin.*

Araokadenn vras ar foenneier.

Ret eo ivez teurel evez ouz an araokadenn vras graet gant ar foenneier. Dre-se, eo bet gwellaet kalz ar sevel chatal, en hor Bro.

E 1912 ez oa e Breiz-Izel (Finister, C.-du-Nord, Morbihan) 128.000 devez-arat dindan foenn pe dirienn (douar-leton). E 1929 e kaver 182.000 devez-arat.

Ar boued-chatal, evel betra-bez, irvin, rita..., goude beza aet ivez kalz war-raok, ne greskont mui d'ar c'houlz-mañ, ha kredi 'ran e vezint dilezet a nebeudou : gwall gér e teuont da veza pa sonjer el labour a vez ganto. Ar boued-chatal glas, kalz pinvidikoc'h e-giz boued, lakef e silo, eo a vezo implijet muioc'h-mui, en amzer da zont.

Ar maga-loened.

Breiz a zo eur vro eus ar c'henta evit maga loened. Amañ eo emañ eienenn vrasa he finvidigez, araok zoken an avalou-douar.

Da genta, komzomp eus ar c'hezeg.

Hervez eur skrid koz, ez oa e Breiz e 1740 180.379 loen-kezeg. Kezeg bihan e oa ar re-se, a-dra-sur, anezo kezeg limon, ha kezeg-dibr pe kezeg-samm.

Gwellaet kalz eo bet, abaoe, ar c'hezeg breizek, rak bez e c'heller lavaret hon eus eur ouenn vreizek a loened-kezeg, daoust ma c'hell beza disheñvel eus eur c'horn-bro d'egile. Dre holl, e Treger, Leon, Kerne ha Gwened, e kaver kezeg eus an dibab. E-doug ar brezel 14, n'eus ket bet kavet gwelloc'h eget kezeg Bro-Gallag.

Breiz-Uhel, dreist-holl Bro-Foujara, ha Vitre, a zo gwall verket gant an orin-kezeg percheronek.

Evel-just, gant ar binviou-labour hag ar c'hirri-dre-dan a gaver bremañ, eo aet war a-dreñv niver ar c'hezeg. Daoust da-se, ne gredan ket avat e ve echu gant amzer ar c'hezeg. Ar mouteur n'hell morse ober pep labour, war ar maez.

Ar Saout.

Eus an tri orin saout a gaved gwechall e Breiz, e chom ganeomp hirio, dreist-holl, ar saout du, anvet c'hoaz saout-Kerne. Ma n'eo ket gwall founus evit ar c'higer, mat kenañ eo da rei laez, hag aes eo da sevel. Kavet e vez dreist-holl e Bro-Kerne hag e Bro-Wened. Met Leoniz ha Tregeriz, muioc'h-mui, a zo kroget ivez da sevel anezi.

Diwar ar saout ruz hag an tirvi Durham ez eus deuet e Breiz eur ouenn all a saout, anvet saout Armorikan. Deuet eo zoken da veza ar stanka e Breiz, dreist-holl e Breiz-Izel.

Bras ha pounner evel ma 'z eo, n'eus ket gwelloc'h evit ar gigerez. Falloc'h eo, avat da rei laez. Met kroget mat or d'he gwellaat war ar poent-mañ. Bez e kaver saout hag a c'hell rei betek 5.000, 6.000 ha zoken 7.000 litrad laez.

Savet e vez ivez e Breiz, saout a orin Normand dreist-holl er C'hôtes-du-Nord hag en Ille-et-Vilaine. N'eus ket kaeroc'h saout er bed. Met da ziuall a zo outi, rak kaout a renk bevañs pinvidik.

E-kichen an orinou-se, e kaver saout all ha ne dalvez ket ar boan nomz anezo, dre ma n'o deus talvoudegezh ebet.

Ar Skoazelléréz Familh (l'aide familiale)

Ar skoazelléréz familh a zo bet savet, meur a vloaz a zo er Frañs, evit dont war sikour ar mammot a familh diwar ar mēz brevet gant al labour, evit rei skoazell d'ezo da sevel ervat o bugale.

En hor c'horn-bro ive, pevar bloaz a zo, eur strollad tadou ha mammou a familh, poaniet ha teneret gant kement-mañ, a sonjas e ve eun dra vat, sevel kement-all, evit dont war sikour familhou hor bro.

Sonjet e voe neuze, keleenn evit ar garg-se, plac'hed yaouank hag a c'hoantea, rei o amzer, hag o bolontez vat, evit skoazella ar mammou a familh-se, re skuizet gant o c'harg.

— Ar plac'h yaouank eta he deus ar youl-se, a rank mont da genta, da beur-zeski he micher en unan eus ar skoliou savet evit kement-se. Pep tra a vez desket enno evit ren eun tiegez hag ober al labour ret en eun ti diwar ar mēz.

Goude an tri miz skol-se, e ranko, evit beza ampart awalc'h, tremen eur miz all en eur c'hlinique, da zeski ober war-dro ar re glañv, hag ar yugaligou nevez ganet.

Ha goude, setu-i prest da vont en eur barrez, el lec'h ma 'z eus savet eur strollad-familhou, evit ren he labour hag he c'hemeret en o c'harg. Pour-chaset o deus evit he digemer eur gamprig renket brao, hag a vezo eviti eun diskuiz, goude an deveziad labour pounner awechou !!!

N'eo ket awalc'h pourvei da gement-mañ. Ret e vo dreist-holl kaout labour eviti, ar pez ne vez ket atao gwall-êz er penn kenta !! Fiziañs an dud, ne vez ket gounezet evelse en eun devez. — Neuze adarre, roll ar strollad a vo gounit fiziañs o c'henvroiz, ha beza war evez eus ezommou tud o c'hontre. — Pebez tra gaer eveljust ar sikour-se hag a zo eur merk eus ar garantez vras a dleomp an eil evit egile.

— Setu trivec'h miz tremenet, abaoe ma 'z eus digouezet, evel skoazelléréz, en eur barrez a vro Leon. Meur a dra a c'hellfen da skriva diwar-benn va micher ! Nag a vammou o deus diskouezet d'in o anaoudegezh vat, evit ar skoazell rentet d'ezo, pa oant war o gwele, dizoursiet ma oant eus pep tra wardro an tiegez, dre ma edon eno o veilha war o bugaligou.

Eun dro em eus bet da gemeret plas ar vamm aet d'ar c'hlinique evit beza operet. — Chomm a rea ganen er gér eur c'hrouadurig tri miz, eun all seitek miz hep bale, hag an diou gosa pemp ha c'houec'h vloaz.

An tad ive a oa aet d'ar c'hlinique gant e wreg setu ma edon va unan, gant an tiad bugaligou, hag ar chatal da soursial outo er c'hreier !! Ar garg-se a oa eun tammig pounner evidon. — Eñruzamant, d'am zro, e kavis tud a volontez vat da rei an dourn d'in wardro ar chatal, hag en noz, eur plac'h yaouank eus ar c'hontre a deue da loja ganen. Eur miz e chomis eno, betek ma kavas a nevez ar yec'hed, ar vamm yaouank-se, laouen adarre ha gouest da adkemer he c'harg war-dro he bugaligou.

Evelse ez an bemdez, eus an eil ti d'egile, evit rei skoazell amañ hag ahont, el lec'h ma 'z eus ezomm.

Bras eo an dachenn ! ha nebeut omp c'hoaz (1) ; ezomm a zo e komprenfe ar plac'hed yaouank, an ezomm-vras a zo eus bolontez vat pep hini, evit ma vevo an holl eur vuhez welloc'h el lec'h ma reno an unvaniez, dre ar skoazell ret evit eürusedd peb dén.

Eur Skoazelléréz.

(1) Bez ez eus hirio e eskopti Kemper ha Leon 14 skoazelléréz familh ; holl emaint d'ar mare-mañ e parrezioù bro-Leon : Plouzane, Plabenneg, Plouzeniel, Plouzevede, Plouenan, Plouvorn, Ploueskad, Plourin, Plouvian, Plouziri, Kleder, Brelez.

Ar plac'hed yaouank o defe c'hoant en em rei d'an oberenn a garantez-mañ, n'o deus nemet gwelet unan bennak eus beleien o farrez, o lakaio da zarempredi ar re a zo e penn ar gevredigezh, a roio d'ezo pep sklerijenn.

C'HOARZOMP

ALUZENN AN DIAOUL

Kontadenn a vro Portugal.

Antonio a dremene alies e-kichen chapel Sant Bertele.

Boazet e vez da rei e aluzenn eno.

Lakaat a rae pemzek real er c'hef bewech : Dek real evit an Anaon, pemp real evit an diaoul.

— Doue a vez mat ; an diaoul avat ne vez ket fall atao, a soñje Antonio.

Eun deiz en doa Antonio merennet diwar viou fritet en eun ostaleri. N'en devoa ket arc'hant a-walc'h evit o faea ha...

....

Pell amzer goude e tremenas Antonio eno adarre.

An ostiz o welout anezañ a lavaras d'ezañ e begement :

— Ac'hanta ! Paotr, distroet oc'h ? Bremañ 'vat e vo ret d'eoc'h paea ar viou hoc'h eus debret :

Abaoue keit-all, ar viou o dije bet roet yer. Ar yer o dije dozvet viou. Ar viou-se o dije roet yer all. Hag ar yer all-se o dije bet dozvet c'hoaz viou all, hag all... Ha ma ne baeit ket ez eoc'h d'an toull-bac'h.

Madou Antonio n'o dije ket padet da baea kemend-all a viou.

Trubuilhet, ez eas Antonio pelloc'h d'ober eun diskuiz. Ober a reas eun azez, war eur maen, e toull-karr eur c'hoad. Eno e chomas da soñjal er pez a oa c'hoar-vezet gantañ.

E-keit-se e tigouezas eun den dirazañ.

Rous e oa bleo an den. Louz e oa, gwisket en eun doare ma 'z oa eun druez sellet outañ.

Hag hen da c'houlenn ouz Antonio :

— Asa ! paotr, petra fall a c'hoari ganeoc'h ?

— Aotrou, eme Antonio, setu pell amzer 'zo em eus merennet diwar viou fritet en ostaleri-hont. N'edo ket an arc'hant o ruih war ar raden ganen d'ar mare-se. N'em boa ket paet va viou, ha bremañ e fell da berc'henn an ostaleri va lakaat da baea, n'eo ket hepken ar viou am eus debret, met ive ar yer a vije bet deuet diwar ar viou-se, hag ar viou a vije bet dozvet gant ar yer-se, ha c'hoaz, ar yer a vije bet deuet eus ar viou all-se... kement ha kement ma n'em eus na madou nag arc'hant a-walc'h d'o faea holl... Ret e vo d'in mont d'an toull-bac'h, a-dra-sur.

An den truilhek, an diaoul an hini e oa, a respontas d'ezañ :

— Bezit d'inec'h, ho tifenn a rin. D'an deiz ma 'z eoc'h d'al lezvarn me a vo ganeoc'h. Ar barner a c'houlenn diganeoc'h : « E pelec'h emañ ho tifenmour ? » Respont a reoc'h d'ezañ : « Emañ o tont ».

Ar barner a c'houlenn diganeoc'h c'hoaz ano ho tifenmour. Respont a reoc'h d'ezañ adarre : « N'ouzon ket Ao, Barner, emañ-hen o tont ».

....

Dont a reas mare ar varn.

Ar Barner a c'houlennas ouz Antonio :

— E pelec'h emañ ho tifenmour ?

— Emañ o tont, a eilgerias Antonio.

— Pe ano en deus ho tifenmour ?

— N'ouzon ket Ao, Barner, met emañ-hen o tont.

Kerkent e teuas tre an diaoul.

Edo gwisket e-giz ar wech kenta. Lousoc'h e oa c'hoaz zoken. Sulihet e oa e zremm hag e zaouarn gant ar voged. Saludi a reas an aotrou barner hag an dud a en em gave el lezvarn.

— Asa Aotrou ! petra e teuit d'ober emañ, louz evel ma 'z oc'h ? eme ar Barner.

— Dont a ran da zifenn ar paourkêz den-mañ.

— O'houi eo a zeu d'hen difenn hag e teuit ken truilhek-se... ha ken diwezat !
— Diwezadik emañ e gwirionez, Aotrou Barner, met edon o tastum kistin rostet. Ne felle ket d'in o lezel da yena, ha ret e oa d'in raktal o flanta, d'ezo da rei gwez kistin nevez.

— Biskoaz kemend-all ! ha gwelet hoc'h eus-c'houi gwez kistin o tiwan diwar kistin rostet ?

— Ha c'houi, ha gwelet hoc'h eus, eur wech bennak, yer bihan o tinoda eus viou fritet ?

— Ar wirionez a zo ganeoc'h, a respontas ar barner. It kuit ho taou.

....

Antonio a soñjas ennañ e-unan :

— Doue a zo mat, met an diaoul ne vez ket fall atao...

Hag e kendalc'has da rei dek real d'an Anaon ha pemp real u'an diaoul.

Breur Dominik.



Eur gontadennig

Beza ez oa, eur wech, eun ozac'h hag e c'hwreg ha ne vezent ket alies er memez lavar.

Ma save arne ha... kurun !

Ar c'hwreg eun deiz, skuiz gant ar bazadou, a ya da gaout ar barner, d'en em glemm.

— Aotrou, emezi, ar prizoniou n'int ket great evit ar chas. Pa zeu eur gwaz da rei bazadou d'e c'hwreg, evit terri warnañ n'eus ket par d'hen teuler er prizoun. Me n'em eus buhez ebet ken du mañ, gant va hini.

— Lavarit d'ezan dont d'am c'hoaut ha me a roio d'ezan eur gentel vat. Ma ne wella ket e vo gwelet petra d'ober.

Setu an ozac'h d'e dro dirak ar barner.

— Ar vaouez, pôtr paour, n'eo ket eun anne da lopa warni a-nerz korf...

— Oh ! aotrou barner, evit eun nebeudig taoliou am eus roët d'ez, gant va mouchouer-fri !...

— N'oc'h eus skoet nemet gant ho mouchouer-fri ?

— Ker gwir hag emañ emañ, aotrou barner ; kredit ac'hanon, me n'oun ket eur gaouiad.

— Keit ha ne skoi nemet gant da vouchouer-fri, n'em eus ket kalz a dra da lavaret. Gant da vouchouer-fri hepken, klevet a rez ? Anez da-ze me eo a lakaio c'houeza d'it da fri.

Pemzek devez a dremen. Emañ ar vaouez adarre dirak ar barner, eur penn outi, n'eo ket evel ouz eun den : al lagad kleiz a zo blonset ha perz-du ; ar jot zehou a zo a-zistribiñ ; ar vuzell d'an neac'h a zo faoutet...

— Koulskoude, eme ar barner, en doa lavaret d'in...

— Posubl eo, aotrou, da c'hortoz, gwelit e pe stad en deus lakaet e c'hwreg a darre.

— Gant e vouchouer-fri, penaoz ?...

— Penaoz aotrou barner ? N'eo ket diaes da gompren : va goaz ne c'houez morse e fri nemet gant e vizied. E vouchouer-fri eo e graban, ha... ma 'welfec'h pebez golvez !...

Diwar Kannadig Landi.

EUR ZARMOUN IEURIED

VA BREUR KARET,
PLAC'H YAOUANK,
KERENT HA MIGNONED,

DOUE, a lavar d'eomp ar c'hatekiz, en deus krouet an den e evit e anaout, e garet, e servicha ha digouezout evelse e gloar ar Baradoz. Evit kompren mat sakramant ar briedelez eo red kaout ar wirionez-se dirak hor spered.

Goude beza krouet an Neñv hag an douar, ar mor, an aer, an heol, al loar hag ar stered; ar gwez, an ed hag an holl drevajou; ar pesked, al laboused, hag an holl anevaled; Doue a reas eur sell ouz e labour hag her c'havas kaer, ha mat. Koulskoude, a soñjas an Aotrou Doue, ne glevan ket o sevel war-zu ennoun eus ar bed an eus krouet kanaouenn an anaoudegez yat hag ar garantez. An holl grouadurien-se a zo mut ha ne badont ket: hirio ez eus anezo ha warc'hoaz e vezint tremenet. Groomp 'ta an den heñvel ouzomp, gant eun ene gouest d'am anaout ha d'am c'haret evel m'eo dleet, eun ene ha ne varv ket hag a c'hello, pell goude marc ar c'horf, beza a-nevez unanet gantañ evit pignat da dañva em rouantelezh an eñvested peurbadus ha da gana va meuleudi da virviken. Hag an Aotrou Doue en eun tamm pri a c'houezas ene an den kenta. Met n'eo ket mat, a soñjas c'hoaz, e vije an den e-unan: roomp d'ezañ kompagnunez. Eus kostezenn Adam Doue a dennas ar vaouez kenta hag he roas d'ezañ da bried en eur lavaret. « Kreskit ha deuit da veza niverus ha da leunia an douar. »

Eus eur c'hantved d'egile, ar familhou a nebeud, a c'holoas an douar. Berndez ar maro a sko milierou anezo, met an eneoù hep ehan a nij war-zu ar bed all. An dud a zo o veva war an douar n'int nemet eul lodennig vihan eus familh an Aotrou Doue.

Al lodenn vrasa eus an dud a zo er bed all. Er baradoz eo emañ hor bro ha ni a zo en hent war-zu ti hon Tad.

Hep dale hon tro a deui da vont dirak Doue. Hor buhez a dremen evel eul luc'hedenn. Doue en deus hor c'hrouet evit hor boda holl endro d'ezañ er baradoz. Hag abalamour m'en deus c'hoant e ve niverus bras e familh, en deus savet sakramant ar briedelez. Dre ar sakramant-se Doue a ro galloud d'ar priedjou da astenn o buhez gant re o bugale evit ma vezo leuniet mat ar plasou pourehaset en Neñv gant hor Salver d'ar re o devezo lakaet o foan da blijout d'ezañ.

Daou zen yaouank a deu d'en em unani ha da lakaat e boutin o foan, o amzer, o madou, o buhez evit ma vezo dalc'hmatac war an douar tud o veachi war-zu an Neñv.

Te, va breur ker, ha c'houi plac'h yaouank, ho peus a bell 'zo komprenet kement-se. En em zibabet ho peus an eil egile e sklerijenn gras Doue. C'houi a anavez talvoudegez ar garantez kristen. Ar brezel hag an disparti n'o deus graet nemet startaat muioc'h mui al liamm santel a unane ho kalonou. Hirio ho kerent hag ho mignoned a sant eur joa divuzul, o welet ac'hanoc'h oc'h en em rei an eil d'egile dirak Aoter Hor Salver.

Setu deuet evidoc'h ar mare da veza eureujet. Dirak an holl dud bodet emañ, dirak an iliz ha dirak Doue, c'houi a zo o vont d'en em ouestla an eil d'egile evit ho puhez penn da benn. Er memez amzer, gras an Aotrou Doue en em silo en hoc'h ene evit ho kennerza, ho sklerijenna, ho santelaat, ho sikour da veza eürus ha da hentcha ho pugale war-zu an eürusted gwirion.

Ar beleg neuze a vennigo ac'hanoc'h gant dour benniget evit ma vezo pellet diouz ho ti an drouk-spered hag e vevélien ha ma reno ar peoc'h hag an unvaniez en ho familh.

Goude-se e vezo benniget ar walenn, a verk al liamm a zo etrezoc'h. Plac'h yaouank, dougit ar walenn-se gant evez: digas a raio d'eoc'h da soñj eus ho leverioù a zoujañs hag a garantez e-keñver ho pried.

An oferenn a vezo lavaret evidoc'h. Ho Salver a gemero ac'hanoc'h war e galon sakr evit ho kinnig da Zoue e Dad e sakrifis. Skuilh a ray warnoc'h e wad santel evit gwalc'hi ha kennerza hoc'h ene.

Goude ar « Bater Noster » ar beleg a zistroio adarre war-zu ennoc'h evit ho penniga a-nevez. Goulenn a ray digant Doue, en ano an iliz, ma reno etrezoc'h ar garantez hag an unaniez, ma vezo eürus hag hir ho puhez ha ma tigouezoc'h e rouantelezh an Neñv evit beza digollet eus ho poan ho labour.

Dizale c'houi a gomanso da ren ho puhez nevez a briedjou. Kerzit gant fiziañs war an hent lugernus digoret dirazoc'h. Doue hag ar Werc'hoz a zo ganeoc'h.

Na kaer ha talvoudus eo ho puhez. Na kaer ha talvoudus eo buhez eur familh gristen diwar ar maez. Kerkent hag an deiz, setu an tad hag ar vamm war vale. Araok mont d'o labour e lavaront eur bater c'houek evit lakaat da ziskenn war an dervez nevez ar c'hras a re he zalvoudegez d'an amzer ha d'ar boan. Al labour, er parkeier, petra bennak ma 'z eo tenn, a zo yac'hus hag ato frouezus. Joa a zo e kalon ar c'houeriad a oar evit piou emañ o labourat. Soñjal a ra en e wreg hag en e vugale. En e galon emañ ar familh a-bez evel eun teñzor prisius. Setu ar vugale o tont da lavaret d'ezañ dont d'e lein. E galon en deus tridet gant ar joa o klevet o mouez skiltrus o tont eus an ode. An ti a zo tomm ha Doue emañ a zo ar mestr kenta. Aze war an daol emañ ar soubenn hag ar bara fresk. Etre diou hedennig pep hini a zebr e damm ha daoulagad ar re vihan a zo o para war o zud hag o mamm. Goude koan e vez lennet buhez ar sent ha lavaret ar grasou.

D'ar sul, al labour a chom a-sav hag an holl a ya d'an oferenn. Ar gwiniz diwanet er park a zo deuet da veza eun osti. Dre zaouarn ar beleg, tad ar barrizioniz, an holl a ginnig da Zoue labour ar sizun. An iliz a dregern gant mouezioù nerzus al labourerien. Goude an oferenn ez aer d'ar vered da bedi evit ar re varo. Ha da c'houde e vez marvailhou. Tud ar barrez a zo holl unanet er memez pedenn, er memez poanioù, er memez levez, evel eur familh vras o pelerina war hent ar Baradoz.

Ra vezo ho tiegez, priedjou nevez, evel eur c'houlaouenn lugernus e « Kreiz ar Gear » vras m'eo ho parrez. Unanet etrezoc'h, mat da sikour hoc'h amezelen hag ho kerent, sentus ouz lezenn an Aotrou Doue, aketus da sakramanti ha da rei skouer vat d'ho pugale, bleinet gant ho person karet, kerzit dispart ha dienkreiz war hent ar sklerijenn hag ar gwir eürusted. Ar vuhez a vezo marteze alies tenn awalc'h. Red mat eo hada e-kreiz ar yenienn evit gellout eosti pa deu an hañv dudi, emamp o c'hortoz, eo rouantelezh ar bed all. Eno e c'hedan ac'hanoc'h holl, kerent ha mignoned, evit ar peurzourn a zo pourchaset d'ar re holl o devezo poaniet.

Evelse bezet graet.

T. C.



BUHEZ AR BLEUN-BRUG

— D'an 31 a viz Genver hon eus bet eur vodadenn all e Gwened, en Ti-Kêr. An Aotrou-meur Baron, Vikel vras, hag an Aotrou Decker maer Gwened a oa er vodadenn, en-dro d'ezo ar c'homite lokal en e bez. Bolontez vat ha sikour a gavomp a-berz an holl.

— D'ar 27 ha d'an 28 eus miz C'houevrer e vo e Gwened eun abadenn-studi evit penn-renerien gristen ar strolladou yaouankiz breizek : Lazou-kana, Kêlchiou, Bagadou, Skoutelezh...

Amañ emañ adarre ar Bleun-Brug war an dachenn a blij d'ezañ ar mui, ha setu perak, bep bloaz e sav seurt abadennou. Ar Bleun-Brug eo ar gevredigez vreizek ha n'eus nemeti hag a labour war bep tachenn ; muioc'h-mui e c'her-stur eo « Feiz ha Breiz ». Laboura a reomp da sanko dounoc'h ar Feiz e Kalonou hor c'henvroiz dre hor c'helaouenn, dre hor c'helennadurez, dre rei lusk d'hor gizioù mat. Labourat a reomp evit Breiz, evit hor yez, dre hor skol dre lizer, dre hor c'haezeadennou er skolioù, dre hor c'henstrivadegou, dre hon embannadurioù er c'helaouennou ha journalioù, dre hon devezioù-studi, dre rei enor d'hor folklor.

Goude bodadegou-studi Boulvriag, Lesneven ha Sant-Brieg hon eus merzet sklêr, an dra reta ha pouezusa eo sevel renerien evit hor yaouankizou.

Rebechet e vez d'ar c'helchiou ha bagadou sonerien beza re nebeut breizek. Koulskoude, alies, ne dalvez ket ar rebech-se. N'eo ket bolontez vat eo a ra diouer d'ezo. Tud desket a-walc'h war draou Breiz d'o ren, ne lavaran ket. Ret soñjal, n'o deus morse, ar yaouankizou-mañ, kavet war o hent, nag er skol-izel, nag er skol-uhel, den ebet d'o c'hentella war draou Breiz. Penaos eta goulenn diganto karout ha difenn ar pezh ne anavezont ket.

Hor mignon Loeiz Roparz, karget gant « Kendalc'h » da gelenn ar brezoneg er c'helchiou, a chom souezet gant an digemer mat a gav e pep lec'h.

Abadenn-studi Gwened, e skolaj Sant Fransez-Xavier, a glasko eta, rei sklerijenn, kentella, entana renerien hor yaouankizou.

Pedi a reomp start, an holl re o deus karg da ren, da zont da gemer perz er vodadenn-studi-se, koulz gwazed, koulz merc'hed.

Digeri a ra d'ar 27 a viz C'houevrer, da 7 eur diouz an noz, dre eur pred a-gevret a vo eur veilhaden war e lerc'h. Ar Wazed a lojo e Sant-Fransez, hag ar merc'hed e ti leanezed ar Retred.

D'ar sul 28, ofrenn da eiz eur, prezeget gant an Aotrou-meur Baron, Vikel-Vras.

10 h. : « Nos préoccupations culturelles face à nos responsabilités chrétiennes et apostoliques », gant an Ao. Bihan, beleg.

11 h. : « Psychologie du garçon et de la fille de 17 à 25 ans », gant an D^r Philippe.

13 h. 30 : « Le mouvement breton dans le courant général des idées du monde actuel », gant an Ao. Loeiz ar Floc'h, beleg.

14 h. 30 : « Conditions d'une renaissance de la vie bretonne », gant an Ao. Duigou.

Etre ar prezegeñnou, pep hini a c'hell diskleria e soñj.

Evit kemer perz er vodadenn, kas kelou da V. Sella, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère).

Skol dre lizer.

Dont a ra d'eomp ato skolidi nevez, 146 hon eus a-benn bremañ war ar roll. Mar feil d'eoc'h heulia hor skol, skrivit d'eomp : permanence, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère).

Prezegeñn war an Ao. Perrot.

Eur brezegeñn war an Ao. Perrot a zo bet graet e Kervreiz, e Pariz, d'ar 24 a viz Genver, gant hor bignon Herri Caouissin. Morse, war a lavarer, ne 'z eus bet gvelet kement a dud e Kervreiz. Plijus e tle beza bet, a-dra-sur, ar brezegeñn-se, rak piou en deus anavezet muioc'h an Ao. Perrot eget Herri Caouissin, a zo bet e sekretour epad dek vloaz. An Ao. Laurent a gomzas ivez. Da heul e voe roet filmou war buhez Tad ar Bleun-Brug.

KELIER

Diwar « Skol hañv » niv. miz Genver.

« ... Bezomp asur ne vo ket saveteet hor yez gant eun dornadig tud hepken, na kennebeut gant an niver brasa, met gant kenlabour ar re genta hag an eil re, pe ma fell d'eoc'h, gant striv eun nebeut a dud skiantek a youl, harpet ha skoazellet gant an holl Vreiziz a youl vat.

Kredi e vo saveteet ene Breiz, en despet da Vreiziz o unan, a zo, d'am soñj, eur fazi na c'hell digas war e lerc'h nemet c'houervoni ha kerse... »

Langleiz.

Skolioù kembraek.

Dek vloaz bennak a zo, Miss Norah Isaac, a savas e LLuest, Bro-Gembre, war c'houlenn ar gerent, eur skol e kembraeg penn-da-benn. Herio ez eus 36 skol evelse e Bro-Gembre. Peur e vo ivez e Breiz, skolioù brezonek penn-da-benn ?

C'hoariva brezonek.

Paotred ha merc'hed Lannilis, da geñver o abadenn a levenez o deus bet c'hoariet « Eun nozveziad reo gwenn » a zo bet plijet kenañ d'ar selaouerien. Eur skouer eo da veza heuliet.

Paotred ha merc'hed Sant-Turio (Morbihan) o deus c'hoariet, evit ar seizvet gwech « Ar hent Betleem » d'ar 14 a viz C'houevrer, dirak an Ao. Baron, Vikel-Vras. Enor ha meuleudi d'ezo !

Ar Pab hag ar brezoneg.

« Maison-Dieu », niv. 35, en eur gomz eus : « Pedennou ha lidoù ar Vadiziant hag an Nouenn », a skriv kement-mañ :

« Evit Kador Sant Pêr, an Euskareg (basque) hag ar Brezoneg a zo yezou gwirion. A-hend-all, a-dra-sur, ne rofe ket aotre d'o implija e lidoù ar Vadiziant hag an Nouenn. »

Ar brezoneg er skol.

Digemeret eo bremañ, da vat, ar brezoneg er B.E.P.C. e-giz « matière à option » ar pezh a zo kalz gwelloc'h eget evit ar bachot. Muioc'h a vrezonegerien a gaver, e-touez ar vugale a labour da c'houit an diplom-mañ.

Eur gounid muioc'h eo evit hor yez. Arabat da zen ebet kredi e ve salvet hor yez en eun doare all estreget dre ar skol. D'ar re holl a fell d'ezo eta savetei ar brezoneg, eo d'ezo beza amañ unanet mat ha stourm dibaouez. Lezel gant an huñvreerien, ar gredenn emañ silvidigez ar yez en eun tu bennak all.

Strolladou folklorek.

Diwarbenn ar strolladou folklorek ez eus bet er « C'hourrier » hag er « Progrès » pennadoù dispar hag a zo bet lennet, a-dra-sur, gant an darn vrasa eus hor mignoned. Netra gwelloc'h, na tost, ne 'z eus bet skrivet morse war an dañvez-se. Goulenn a reomp diganeoc'h respont dreist-holl d'ar c'houlennadeg a zo bet graet da heul ar pennad diweza. Ma n'ho'e eus ket lennet ar pennadoù skrivit d'ar « Progrès » pe d'ar « C'hourrier » : rue des Gentilshommes, Quimper (Finistère).

Nevez deuet er bed.

Klêr, Elizabet hag Anna ar Brun eus Kastel-Pad a gemenn d'eomp o deus bet eus ar Baradoz eur breurig, anvet Dominik. Buhez hir d'ar paotrig : gourc'hemennou d'ar gerent.

Indianed ar C'hanada

Gwechall, an darn vuia eus Indianed ar C'hanada a veve hañv-goañv er c'hoadoù bras dindan deltennoù-kroc'hen. C'hoaz a zo hag a ra evelse.

Eur c'halz anezo avat, bremañ, o deus tiez e-kichen kêrioù an dud wenn, war dachennoù miret evito. Eno e vevont adalek an nevez-amzer bete deizioù kentañ an diskar-amzer. Neuze, kerkent ha ma krog an heol da goll e nerz e weler anezo o kuitaat o ziez, bugale hag all, evit monet da chaseal d'ar c'hoadou doun, pep hini war e dachenn-vro, pell en hanternoz.

Kas a reont ganto o zeltennou, fuzuilhou ha tennou, boued-mir ha butun. Kig al loened lazeta ganto a vezo al lodenn vrasa eus o bevañs.

Pa zeu an nevez-hañv e tistroont eus ar forest gant krec'hin lern, bevered, marted h. a. O gwerza a reont pe o eskemm evit disterajou pe evit traou iskis awêchou, rak chomet int, tamm pe damm, evel kalz a dud « gouez » all, sod gant ar braoigou a bep seurt.

Istorioù fentus a zispleger diwar-benn prenadennoù graet gant Indianed mezevet gant an arc'hant gounezeta ganto p'o devez graet eur goañveziad-chase mat.

Eun dervez, eur Meneziad (Indian eus Hanternez bro-Gebek), gwerzet-mat e grech'hin gantañ, a-vec'h distroet d'ar gêr, ne gavas netra gwelloc'h evit kaeraat e di ha tañva plijadur ar muzik, eget prenañ eur piano a zaou-c'hant dollar. Eun nebeut mizioù goude e lakae ar piano paour a dammoù gant e vouc'hal.

Unan all — ha na ouie na lenn na skriva — a brenas eun armel-levrioù nevez e koad-kraoñ du ha pa oa goulennet outañ petra edo e sell da ober gant ar prena-se e respontas e oa evit renka e dennou hag e vutun !

Eur Meneziad c'hoaz a ginnige krec'hin o talvezout ugent gwech muioc'h, evit eur c'harnedad kartennou-post hag eur fonograf. Ar pezh n'eo netra e-keñver an hini a ginnige eur c'hroc'hen-louarn kaer-dreist evit eur voestad-sardined !

Eur misioner, bet hanter-kant vloaz el Labrador e-touez Meneziz ha Naskopied, a gont penaos eun Indian, bet dastumet gantañ 27.000 dollar (eun dek milion bennak a lurioù gall) oc'h ober kenwerz ar c'hrec'hin, a goufonas e beadra en eur ober daou vloaz. Prena a rae kement a wele ken na gouezas, hag eñ koz a-benn neuze, er baourentez rusa ha ma rankas beva diwar an aluzen er peurrest eus e vuhez.

Ret eo anzav na c'hoarvez ket traou e-giz-se ken alies ha gwechall. An darn-vuia eus an dud kroc'hen ruz-se, dreist-holl an Indianed Kri, Irokwaë, Huron, Paouni, en eur gêr, an holl veuriadou o veva tost a-walc'h ouz an dud wenn, a anavez tamm pe damm hor sevenadur. Da skouer, n'eus ket c'hoaz a dri miz e weler eun Irokwaë o vlenia ur c'harr-dre-dan amerikan hag a goustfe daou vilion hanter e Breiz.

Daoust da se avat, an Indianed a blij dezo atao ar bitrakou gwer, ar bizeier-houarn alaouret hag ar medalennoù kouevr lufret. Bepred ez int bugale simpl an natur, pegen kreñv bennak e c'hellont beza bet levezonet gant ar « sevenadur » gwenn. Ma 'z eus bet rebechet dezo beza disizius diouz ar re wenn, piou a anzavo emañ ar gaou penn-da-benn ganto pa soñjor pet gwech ez int bet laeret gant ar varc'hadourien. pet ez eus bet lazeta anezo gant an alouberien ha pegen didruez ez int bet diberehennet eus o bro goz ?



Jakez Konan.
Kanada : 25/7/53.

Truez ouz ar paour !

Pa deu an noz war hon roziou,
Ar cleunienn gaer 'bak he deliou,
'Bak he deliou pa deu an noz,
An noz-du yén war 'r mene koz.

E loch ar paour, e-tal ar waz,
Eur c'houlouenn a luc'he c'hoaz ;
Gant mouez ar ster, en ti bihan
Me 'm eus klevet 'sevel eur c'han.

— « O kousk, va mab, echu an de !
O kousk, bugel, va c'harante !
Kousk ha kousk mat, setu an noz,
An noz-du yén war 'r mene koz. »

Garmi, neuze, va 'r mabig kêz ;
N'eus kén 'vitañ eur banne lêz.
'N e vouez klemmus 'neus lavaret :
— « Torr, va mammig, torr va zec'hed. »

— « O kousk va mab, n'em eus tra kén ;
En ti e c'houez an avel yén.
N'am eus kén koad, o mab, kousket
War an tamm plouz amañ ledet. »



Gwelet am eus an intañvez
O pak' he mab 'tousez ar pilhou.
— « Eur bern 'a zo el levezet,
E-keit 'moun-me o skuilh daerou. »

« Ar pinvidik, en e gastell,
A gousk fenoz en eur gwele.
Ha me n'em eus 'vit va bugel
Na dilhad tomm, na boued ive. »

« Perak me paour hag i pinvik ?
Perak me louz hag i fichet ?
Dilezet oun, i enoret.
Perak e kren va bugelig ? »

Ar vamm doaniet he deus sellet
Trezek he mab, kaer astenet...
Ne finv ket kén ! O mamm tostet.
Da ra' sur 'walc'h a zo kousket...

Gwall-bell amzer he deus gouelet
War he daoulin, an intañvez,
He daoulagad mil gwech beuzet.
Dirak korf merv he bugel kez.



Deuet oun c'hoaz war ar gribenn.
Ne welen ken ar c'houlouenn.
Mouez ar wazig a oa klemmus.
Ha loch ar paour a oa peoc'hus.

Eñ an ankou d'in n'eus laret :
— « Petra, o barz, ac'h eus soñjet ?
An intañvez gant ar glac'har
A zo tec'het diouz an douar. »

« Kent ar beure, er gwall-amzer,
Deus paket-hi he bugel noaz.
Ouz' an neñv du n'eus sellet taer,
En eur lammat e-kreiz ar waz. »

Skrivet eo kreiz ar steredenn,
En he splannder a-us hor penn :
« Truez, truez ouz an den paour !
Malloz d'an hini en deus aour. »

« Malloz d'an hini en deus aour
Hep aluzen 'vit an den paour. »

Milik ar Skañv.

Neuz ar bed a hirio a zo kaer da welet, dre vras, gant an atakadennoù bet graet ken stank er bloavezioù tremenet. Met, pa seller piz outañ, e kaver kalz tud, dreist-holl er c'herioù, o veva er vrasa mizer, tud hanter-noaz, ti ebet d'ezo, o vervel gant an naon hag ar riou. Eur beleg, an Ao. Pêr, en deus sachet evez an holl, war an dud reuzendik-se, ha digoret meur a galon da lezenn ar garantez.



Skol ar bobl

Abaoue eun nebeudig 'zo, e chomer kalz a-sav dirak gwerenn an Itron Kemere, e ru Kergelen e Kemper.

Petra 'ta 'zo eno da welet ? Eun dra plijus-kenañ hag ijineta-kaer : *eur skol vrezonek evit an holl.*

Gwelet a reer a-dreñv d'ar werenn eun diskouezadeg laboused en-dro d'eun daolenn-zu.

Pep labous en deus dindanañ e hano, e brezoneg hag e galleg. War an daolenn-zu e lenner eur gentel vrezonek war unan pe unan eus al laboused, kentel hag a vez kemmet bep daou zevrez.

A-walc'h eo trerien eun nebeudig amzer e stal an Itron Kemere evit gwellet pegen poblek eo an doare-keleñn-se.

Lennet em eus war an daolenn, eur gentel war ar big :

« Piou ne anavez ket ar big, al labous kaer-se a vez gwellet e pep lec'h, war ar maeziou ?

Klervet e vez o ragachat, eus ar mintin betek an noz.

He neiz a vez alies pintet e beg eur wezenn uhel.

Ficht e vez ganti gant traou skedus ha lintrus lacret piou 'oar e pelec'h ?

Laza ha debri a ra al laboused bihan en o neiziou.

Ar pennglaouig, ken brao n'en deus ket gwasoc'h enebourez.

N'eo ket eul labous direbech eta, met distruja 'ra kalz a breñved.

N'eo ket re ziaes dont a-benn d'he doñvaat. »

Peur e vo gwelet kemend-all e pep ker a Vreiz ? Gourc'hemennou ha meuleudi d'an Itron Kemere.